

— 4 —

Karantez dreist kement zo à zo red er bed-ma :
 Karantez d'ar vugale ha d'ho zud d'ho beva,
 Karantez d'ar gristenien ouz Doue, oud ho bro,
 Karantez a Jaz ar boan hag a drec'h ar maro.

Santez Anna venniget, etc.

Santez Anna venniget, selaouit oud pedeun
 Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
 Ha kristenien e karfent kas d'ann nenv ho c'halouin,
 Kén huel hag ar stered dreist gweled ar mor doun.

Santez Anna venniget, etc.

Ann tri dra a c'houlen nomp zo red, 'vel a c'houzoc'h,
 Evit harpa hor buez, beza hevel ouz-hoc'h :
 Heuilla lezenn hon Doue, ha goude kaout anken
 Mont d'ann nenv, santez Anna, d'ho meuli da-viken.

Santez Anna venniget, selaouit oud pedenn
 Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
 A c'houlen ouz-hoc'h bemdez, oud ho merc'h Mamm Doue,
 Douar ho bro pa varvint, Baradoz d'ho ené.

(PROPRIÉTÉ DE SAINTE-ANNE DE L'ÎLE DE BATZ.)

En cédant la propriété de ce Cantique à Sainte-Anne de l'île de Batz,
 l'auteur désire qu'on n'y fasse jamais aucun changement ni dans le sens
 ni dans les mots.


G. M.

Brest. — Mouillet e ti F. Halégouët, ru Kieber, 71.

KANTIK

SANTEZ ANNA

ENN ILIZ SANT-PAOL E PENN ENEZ-VAZ



ENN ILIZ PAOL E-KREIZ ANN TREAS,
 ENN HE ZI-BED E PENN VAZ,
 ANN NEB A BED SANTEZ ANNA
 NE C'HOARTEZ DROUK E-BED GANT-HA.
 KANTIK ALL DA SANTEZ ANNA.

WAR DON : Santez Mari, Mamm Doue

Santez Anna venniget, c'houi zo teir gweach euruz :
 Pried Joasim, mamm Mari ha mamm-goz da Jezuz,
 Dreist-hoc'h n'euz bet, ne vez o-vez an oll gragez,
 War ann douar, enn nenvon, nemet ho merc'h Gwerchiez.

DISKAN :

Santez Anna venniget, selaouit oud pedenn
 Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
 A c'houlen ouz-hoc'h bemdez, oud ho merc'h Mamm Doue,
 Douar ho bro pa varvint, Baradoz d'ho ené.

Ho puez gant sant Joasim zo bet santel-meurbed :
Karet Doue, ober vad d'ar re boaniet er bed ;
Ho madou e teir lodenn : unan roec'h d'ar beorien,
Ann eil a roec'h d'ann Iliz, ha beva gant e-hen.

Santez Anna venniget, etc.

Eunn eal deut a-berz Doue d'e-hoc'h a lavaraz
E vijec'h māmm da eur verc'h, eur verc'h a vije braz,
Eur verc'h hag a lakaje ann nenvou da gana,
Ann douar holl da dridall, an ifern da grena.

Santez Anna venniget, etc.

Eul labour ar re gaera voa hen-nez da ober,
Genel ha sevel eur verc'h evit Mamm d'hor Zalver ;
Hag ho tivreach', ho kaloun, dre nerz Done, zougaz
Divreach' ha kaloun Mari da veza leun a c'hraz.

Santez Anna venniget, etc.

Skouer priejou ha mammou oc'h bet hed ho puez,
Skouer euz a bep madelez ; — c'houi voa leun a druez
Oc'h kement deu a welac'h e poan hag e glac'har ; —
C'houi zo mad er Baradoz, evel war ann douar.

Santez Anna venniget, etc.

Ho madelez, ho kalloud a zo kresket zo-ken ;
Evit beza selaouet, n'ho peuz nemet gouleñn.
Selaouet, santez Anna, pedenn tud Enez-Vaz,
Merched ha martoloded e-kreiz poan ha mor braz.

Santez Anna venniget, etc.

Ama dirak hoc'h aoter, e penn iliz sant Paol,
Daoulinet braz hā bihan emaomp o pedi holi,
O c'houleñn war ar bed-ma digant ho madelez
Evit hon tud, évid-omp, nerz, feiz ha karantez.

Santez Anna venniget, etc.

Ann nerz-se a c'houleñnomp a c'houzoc'h a zo red
Da yerc'hed da labourat, ha d'ho martoloded
A rank mont pell dioud ho bro, ha pa ve rann-galoun,
Da veva pe-da verval war eur mor braz ha doun.

Santez Anna venniget, etc.

Santez Anna venniget, selaouit oud pedenn
Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
A c'houlen digan-e-hoc'h breur, map, pried ha tad
Hag a c'houzezo da biou e vezò dlet ho mad.

Santez Anna venniget, etc.

Kaout feiz kre a c'houleñnomp muioc'h eget madou,
Evit mont goude meravel d'ann nenv gant hon tadou ;
Feiz sant Paol Aurelien, kenta Eskop a Leon,
Marvet e peniti-Baz ha choumet hor patron.

Santez Anna venniget, etc.

Santez Anna venniget, selaouit oud pedenn
Merc'hed ha martoloded a zo gwir gristenien,
Ha kristenien e c'houzont n'euz nerz evit padout,
Ma na deu ket feiz Jezuz da rei d'ezhi galloud.

Santez Anna venniget, etc.